

UN ATEBEG·EZ LEC'H DEGEMER BUGALIGOÙE BREZHONEG

Fellout a ra deoc'h en em ouestlañ d'ur raktres dibar ha nevezus a lakay war wel ar brezhoneg evel un ostilh da skoazellañ ha diorren al liesseurted sevenadurel. Dedennet oc'h gant kas ar brezhoneg war-raok hag emskiantek ouzh an dalc'hoù liammet gant diorren an divyezhegezh abred. Ha kinnig d'ar vugaligoù, forzh pe orin e vefe o hini, an endro ma kreskint en o bleud diouzh ar gwellañ ma c'haller, eo ar pezh a blij deoc'h da gentañ-penn war ho micher. Evit seveniñ ar c'hefridioù-se e-barzh ar vagouri vrezhonek kevredigezhel a 15 plas hag a vo digoret ganeomp, emamp o tuta un atebeg·ez framm.

5 den a-vicher war ar vugaligoù az aio d'ober ar skipailh nevez : 1 atebeg.ez LDB, 1 SB (skoazeller-ez bugaligoù), 3 TGM ADB (testeni gousted vicherel ambrouger-ez desevel ar vugaligoù). LDB da zigeriñ a-benn miz Gwengolo 2023 e karter S. Pêr Brest.

KEFRIDI

Ho pal, evel rener pe renerez ar vagouri, a vo kemer perzh e divorfilañ ar vugale en ur zoujañ d'o lusk ha d'o ezhommoù. Evit-se, talvoudoù ar ren skipailhoù en ur mod perzhiek a glot gant ho re, ha mestroniañ a rit an ostilhoù merañ a-fet obererezh, melestradurezh ha kontouriezh.

- ✓ Sevel ha sammañ ar raktres framm,
- ✓ Bezañ atebek war kalite an doare ma vo kemeret ar vugale e karg ha graet war-dro al liamm gant o familhoù,
- ✓ Tuta, sterniañ ha buheziñ ar skipailh,
- ✓ Ambroug digoradur ar framm : heuliañ al labourioù, ober war-dro klask ha kevraouiñ gant pourvezerien al liesdegemer (trezoù, predoù, produoù a-fet yec'hederezh,...)
- ✓ Kenurzhiañ ar skridaozañ evit an holl deulioù reoliek,
- ✓ Bezañ atebek war mererezh hollek an LDB e liamm gant mererezh ha burev kevredigezh SKED (heuliañ obererezh, budjed, koskor), didan atebegezh prezidantelezh,
- ✓ Dileuriañ an LDB dirak Kêr Vrest, ar c'hKGT, ar GMB hag an OPAB,
- ✓ Ober ma vo lakaet e pleustr ar reolennoù a-fet surentez, yec'hederezh ha kempouez magañ, e liamm gant ar skoazeller.ez bugaligoù,
- ✓ Bezañ gwevn hag en em ober diouzh pep degouezh evit degemer ar vugale,
- ✓ Ambroug ar raktres kevredigezhel e kenlabour gant ar C'huzul-merañ ha Kuzul ar gerent,
- ✓ Klask kevelerezhioù diavaez, diorren anezho, ha klask danvez arc'hantaouiñ ouzhpenn evit ar framm,
- ✓ Kemer perzh e kenemprañ lec'hel ar vagouri, e luskañ buhez ar c'hevredigezhioù, ijinañ oberoù en-dro d'al lusk-se, kas war-raok ar modoù kenlabourat...

TALVOUDOÙ LIAMMET

- ✓ Degemer pep hini en ur zoujañ d'e istor, d'e sevenadur ha kaout ur sell madelezhus war kement tad pe mamm, bugel ha den a-vicher,
- ✓ Ambroug ar raktres evit a sell ouzh e berzh harpañ ha diorren ar brezhoneg e Penn-ar-Bed
- ✓ Krouiñ liammoù etre ar vugale, ar familhoù, gant an dud a-vicher hag a youl vat, pa zegemerer ha pa gimiader diouzh ar bugel, hag ivez e-kerzh prantadoù eskemm plijus,
- ✓ Ambroug pep bugel war hentoù an deskiñ, en ur zoujañ d'e lusk, hag ivez tud ar vugale hag a fell dezho magañ o freder en-dro d'o roll tad pe vamm.

AN DEN KLASKET

- ✓ Brezhoneger-ez oc'h
- ✓ Gant an diplom Desaver-ez bugaligoù, skoazeller.ez bugaligoù pe kaout ho peus unan eus an diplomoù eus mellad R2324-34.
- ✓ Labourer ho peus 3 bloavezh d'an nebeutañ evel rener-ez, eilrener-ez, atebeg-ez pe (z)den dave teknikel evit ur framm bugaligoù.
- ✓ Gouest oc'h da gas ho labour o kenlabourat gant kendivizerien lies.
- ✓ Un den aozet oc'h, ha mestroniañ mat a rit ar binvioù stlenn.

DA C'HOUZOUT

- ✓ Framm : SKED – Kevredigezh hep pal kenwerzhel
- ✓ Lec'h : Skol bublik Kergaouiad – 22 straed Liège – Brest (29) – Savadurioù enno labourioù war ar stern. Digoradur programmet a-benn miz Gwengolo 2023.
- ✓ Kevrat : KDP (kevrat didermen he fad) – leunamzer - Emglev alifsa
- ✓ Deiziad deroù ar gevrat : 12 a viz Even 2023
- ✓ Gopr : 2 400 € kriz bep miz



RESPONSABLE D'ÉTABLISSEMENT D'ACCUEIL DU JEUNE ENFANT EN LANGUE BRETONNE

Vous êtes concerné·e par le développement de la langue bretonne et conscient·e des enjeux liés au développement du bilinguisme précoce. Par ailleurs, votre première satisfaction professionnelle est d'offrir le meilleur cadre possible à l'épanouissement du jeune enfant, quelque soit son origine sociale. Vous souhaitez vous engager dans un projet original et novateur mettant en avant la langue bretonne comme outil de soutien à la promotion de la diversité culturelle. Pour assurer ces missions au sein de notre future crèche associative en langue bretonne de 15 places, nous recrutons notre responsable de structure F/H.

La nouvelle équipe sera composée de 5 professionnels de la petite enfance : 1 responsable EAJE, 1 AP, 3 CAP AEPE. Ouverture programmée de l'EAJE en septembre 2023 quartier St Pierre, à Brest.

MISSIONS

Votre objectif en tant que directeur, directrice, de la crèche sera de contribuer à l'éveil des enfants dans le respect de leur rythme et de leurs besoins. Pour ce faire, vous adhérez aux valeurs du management participatif et maîtrisez les outils de gestion d'activité, administrative et comptable.

- ✓ Construire et porter le projet d'établissement,
- ✓ Être responsable de la qualité de prise en charge des enfants et du lien avec les familles,
- ✓ Assurer le recrutement, puis l'encadrement et l'animation de l'équipe,
- ✓ Accompagner l'ouverture de la structure : suivi des travaux, recherche et contractualisation avec les fournisseurs du multi-accueil (couches, repas, produits d'hygiène,...)
- ✓ Coordination de la rédaction de l'ensemble des documents réglementaires,
- ✓ Responsable de l'administration générale de l'EAJE en lien avec, l'administration et le bureau de l'association (suivi d'activité, du budget, des ressources humaines) et sous la responsabilité de la présidence de SKED,
- ✓ Représenter l'EAJE auprès de la Ville de Brest, la CAF, la PMI et l'OPAB,
- ✓ Assurer l'application des règles de sécurité, d'hygiène et d'équilibre nutritionnel, en lien avec l'auxiliaire de puériculture,
- ✓ Faire preuve de souplesse et d'adaptation pour accueillir les enfants en toute circonstance,
- ✓ Accompagner le projet associatif en collaboration avec le Conseil d'Administration et le Comité de parents,
- ✓ Assurer la recherche et le développement des partenariats extérieurs, ainsi que des recherches de financements complémentaires de la structure,
- ✓ Participer à l'insertion locale de la crèche, à la promotion de la vie associative, imaginer des actions autour de cette dynamique, promouvoir les usages coopératifs...

VALEURS

- ✓ Accueillir chacun dans le respect de son histoire, sa culture et poser un regard bienveillant sur tous les parents, les enfants et les professionnels,
- ✓ Accompagner le projet dans sa dimension de soutien et de développement de la langue bretonne dans le Finistère
- ✓ Créer du lien entre les enfants, les familles, avec les professionnelles et les bénévoles, lors de l'accueil et du départ de l'enfant, mais aussi de temps de partages conviviaux,
- ✓ Accompagner chaque enfant sur les chemins de l'éveil dans le respect de ses rythmes ainsi que les parents qui souhaitent développer leur réflexion autour des fonctions parentales.

PROFIL

- ✓ Bretonnant·e
- ✓ Titulaire du diplôme d'Éducateur de Jeune Enfant, puériculteur·rice ou détenez un des diplômes prévu à l'article R2324-35.
- ✓ Expérience de 3 ans minimum en tant que directeur·rice, adjoint·e, responsable, référent·e technique d'une structure petite enfance.
- ✓ Vous êtes capable de travailler de manière collaborative avec des interlocuteurs multiples,
- ✓ Sens de l'organisation et bonne maîtrise de l'outil informatique

CONDITIONS

- ✓ Structure : SKED - Association à but non lucratif
- ✓ Localisation : Ecole publique de Kerargaouyat - 22 rue de Liège - Brest (29) – Locaux actuellement en réaménagement. Ouverture programmée en septembre 2023
- ✓ Contrat : CDI - plein temps - Convention alifsa
- ✓ Date de début du contrat : 12 juin 2023
- ✓ Salaire : 2 400 € brut mensuel



CV & LETTRE DE MOTIVATION :
DEGEMER@SKED.BZH AVANT LE 28 AVRIL 2023
RENSEIGNEMENTS : PIERRE-YVES LE MENN, 02 98 80 26 71